

07/04

BEAJ EN INIZI GLENAN SORTIE AUX GLÉNANS

D'ar 7 a viz Ebrel e vo aozet ur veaj en inizi Glenan, aozet get Skol Uhel ar Vro. Ar pal kentañ : mont da welet Foeon ar Glenan (Narcisses des Glénans), ur spesad ha ne vez gwelet nemet er lec'h-se ! Mes èl rezon e vo gwelet traoù arall, loened ha plant, hag e vo komzet a istoer an inizi-se ivez. .

Mard oc'h intereset get ar veaj-se, skrivit d'ar chomlec'h-mañ : glenan2018@skoluhelarvro.bzh ha da ksk@ksk.bzh hag e vo kaset doereioù deoc'h.

(C'hwi a gavo muioc'h a ditouroù e kein ar fichenn)

Voyage aux Glénans le 7 avril organisé par Skol Uhel ar Vro pour voir notamment les narcisses des Glénans, une espèce endémique (c'est à dire qu'on ne trouve nulle part sauf dans ce lieu). Cette animation se déroulera entièrement en breton. Si vous êtes intéressés, écrivez à glenan2018@skoluhelarvro.bzh ainsi qu'à ksk@ksk.bzh.

Plus de renseignements (en breton) au dos de la feuille.

www.skoluhelarvro.bzh
www.kerlenn-sten-kidna.bzh



SKOL-UHEL AR VRO
INSTITUT CULTUREL
DE BRETAGNE



Dizoloiñ Foeon ar Glenan

D'ar 7 a viz Ebrél e vo aozet ur veaj eus Konkerne betek an inizi Glenan da vont da welout Foeon ar Glenan, plantenoù a gresk, er bed-holl, war beder enezenn er Glenan hepken. Ambrouget e vo ar weladenn gant daou arbennigour : Roland MOGN ha Patrick DREAN. An displegadurioù ganto a vo **e brezhoneg hepken**, e KLT hag e Gwenedeg.

An inizi Glenan zo anezho pemp enezenn vras : **an Dorchenn, al Leue, an DreNEG, al Loc'h** ha **Sant Nikolaz** ha, tro-dro, un tropellad enezennigoù ha reier bihan.

Dizoloet e voe Foeon ar Glenan gant BONNEMAISON, apotiker e Kemper, e 1804 ha dedennet bras e voe al louzawourien gant ar spesad-se, a zo damheñvel ouzh ur seurtad foeon a gresk er Spagn. Gwall-fonnus e oant war Enez Sant Nikolaz e deroù an 20vet Kantved. Niver ar plant a zigreskas da c'houde, dreist-holl dre faot an douristed, ken aes ma oa dilestrañ war an enezenn. Betek deroù ar bloavezhioù 1970 e voe kutuilhet bleunioù ha tennet bulbennoù forzh pegement. Met ar plant-se ne greskont ket mat e-maez ar Glenan. Ober a reont delioù met ne reont ket bleunioù. Neuze, n'eus nemet ul lec'h er bed ma vez tro d'o gwelout e bleuñv : Enez Sant Nikolaz. An teir enezenn all ma kreskont ivez zo difennet rik mont warno.

Diwar intrudu an SEPNEB (Société pour l'Étude et la Protection de la Nature en Bretagne, Kevredad Studiañ ha Gwareziñ an Natur e Breizh) anvet bremañ «Bretagne Vivante SEPNEB» «Breizh Vev, KSGwNB» e voe roet ar statud a Mirva Naturel d'al lec'h ma kresk an niver brasañ a foeon.

Ar Mirva Naturel zo 1,53 hektar dezhañ e lodenn reter an enezenn Sant Nikolaz. An douaroù zo bet prenet gant Kuzul Departamant Penn-ar-Bed. Abaoe 1977, un amregad-gwarez zo bet staliet tro-dro war Sant Nikolaz ha war an enezennigoù tost : **ar Bez, al Leue** hag **ar Bruneg**.

Ret e vo eta en em ragenskrivañ a-benn bezañ kelaouet e poent. Kasit ur postel da glenan2018@skoluhelarvro.bzh evit bout kelaouet. Resisaet e vo mont-endro ar veaj d'ar re o do roet o adresoù. Ret e vo da bep hini, hep gortoz re bell, en emskrivañ da virout ur plas er vag ouzh Burev Les Vedettes de l'Odet 02.98.57.00.58.

Da zeiz ar veaj, soñjit mat erruout tri c'hardeur pe muioc'h a-raok eur al loc'hañ evit kaout amzer da vont da gemer ho pilhejoù ha da gaout ur plas mat er vag.

Mont da Enez Sant Nikolaz : un eurvezh ma vez brav an amzer. Dont en-dro : un eurvezh c'hoazh. Pourmen war an enezenn : div eurvezh. Moien 'vo d'ar re diaes dezho bale ha d'ar vugale vihan ober an droiad hep poan : ur wenodenn e koad zo bet lakaet war an tuniennoù ha n'eo ket gwall-hir tro an enezenn, ken bihan ma'z eo.

Soñjit ervat emwiskañ diouzh an amzer : botoù bale, dilhad ouzh an avel hag ouzh ar glav, lunoù ha togoù ouzh an heol, diouzh ezhomm ha degasit ganeoc'h gevellunedoù ha peadra da denañ skeudennoù.

TITOUROÙ

• diwar-benn ar foeon hag ar mirva :

<http://www.bretagne-vivante.org/Agir-ensemble/Nos-reserves-naturelles/Reserve-Naturelle-Nationale-Saint-Nicolas-des-Glenan>

• diwar-benn deiz hag eur an treizh (euriadoù 2017) :

<http://www.vedettes-odet.com/wp-content/uploads/2017/03/Glenan-horaires-2017.pdf>

Priz (2017, tud a oad gour) : 38€.

Bugale 4-12 vloaz : 17 €

Bugale yaouankoc'h : 7 €

Da baeañ e Burev Le Vedettes de l'Odet e Konkerne.